

(386, suite)

D'an Autrou an Duc d'Orléans
 Var Badiziant
 Ar C'homt a Paris.

2 mae 1841.

Montroulez, 6 mae 1841.

(387)

Ra deujoc'h, ô va Frinç ! dre ar briedelez,
 Da guemer da bried scoüer eus ar vadelez,
 E credis, el langach eus va brô quer a kreiz,
 Despeign deç'h ar joa vras a zantén bars em c'kreiz.
 A galon e pedis an Doue oll-buissant
 Da zont d'ho fewgarga a bep contantamant,
 En eur accordi deç'h ur Prinç hanval ourzoc'h.
 D'ho renta evrus er bed, hed ma vezoc'h.
 Doue, oc'h evessât atao e rugale,
 A rentas ac'hanoc'h tad evrus hep dale.

Uy dra a vange c'hoas d'ar C'homt eus a Paris :
 Dre 'r Badiziant antren en asgre an Ilis.
 Accomplisset e zeo hirio an act caër-se :
 An oleou sacr zo, gant ministr un Doue
 Scuillet var gorf ar Prinç, evel menq a Cristen,
 Hac a vuguel evrus ar C'hrouer souveren.

Graç dezân da verza hanval ourz Sant-Louis,
 Pini, hed e vez, voe ger stag d'an Ilis !
 Ra verza hanval c'hoas demeus Henni-Pêvar,
 Roue bras ha leal, pini voe heb e bar !
 Graç dezân da verza hanval ourz e Vam guer,
 Ha diouzoc'h, va Frinç, e Dad mad ha tener !
 Ra revot fell-amzer da ellout contemphi
 Brasder ho Puquel ger, a garomp ivez ni.
 Ah ! regeti a rân eus a greiz va ene
 M'er protejo Doue demeus a lein an êe....
 Ra vo e oll deiziou deveziou a voueur !

(388)

462

Ra ello lavaret bep moment ha bep heur :
 « Contant oin diouzon, rac ar vad a meus grêt
 » Da Zoue eo ar gloar : ... Doue ra vo meulet ! ... »
 Pebes joa a gantfen, ò va Fring ! em c'halon,
 O c'houzout oc'h contant ouz reget ur Breton
 Pehini a c'hoanta eus a greiz e ene
 Ma vezot erurus etro pad ho pue ! ...

A. Lédan .

Nota. Ar 6 maë 1841 ec'h adressis va rimou d'ar A. Duc d'Orleans ;
 ar 11 ar Pring endevoa ar vadelez da scrifa din ul lizer a sonch vad ha
 d'am enori demeus a ziou Vedailen : unay bronç hac unan arc'hant, pere
 a representant Boudiziant ar C'homt a Paris, hac a recevis ar 14 .

(Vol. IV, f. 386-388.)